

YF_0100_Arabat eo touch

Du-man e kostez Treger
O 'rabat eo touch
Vager ur plac'hig koant
Me na douchin ket mar gallan miret
Vager ur plac'hig koant
Arabat eo touch.

Bez ' deus daou, tri servijer
N 'oar pelec'h 'man he c'hoant.

Ar c'hentan zo kemener
An eil zo paotr-a-gambr.

An trede zo kereer
Ur paotrig brav ha drant.

Kaset en deus ar muzul
Evit botou arc'hant.

Pa oa esaet ar botou
La'ras d'ar plac'h yaouank.

Me a garfe, koantennig
Mont ganeoc'h en ho kambr.

Eno e-barzh ur gwele
Ni gousko asambles.

'Barzh ur gwele koad melen
Bordet a dantelezh.

Er pevar c'horn ar gwele
Ur boked oranjez.

War pep hini un eostig
O kanan dre e vouezh.

Ma gousko ar c'hereig
E-kichen e vestrez.

Chez nous du côté du Trégor,
Oh, il ne faut pas toucher,
On élève une jolie fille,
Je ne toucherai pas si je puis m'en garder,
On élève une jolie fille,
Il ne faut pas toucher.

Elle a deux, trois fiancés,
Elle ne sait où est son désir.

Le premier est un tailleur,
Le second garçon de chambre.

Le troisième est cordonnier,
Un garçon joli et gai.

Elle a envoyé ses mesures
Pour des souliers d'argent.

Quand les souliers furent essayés,
Il dit à la jeune fille:

Je voudrais, joliette,
Aller avec vous dans votre chambre.

Là, dans un lit
Nous dormirons ensemble.

Dans un lit de bois jaune,
Bordé de dentelle."

Aux quatre coins du lit,
Un bouquet d'oranger.

Sur chacun d'eux un rossignol,
Qui chante par sa voix.

Pour que dorme le petit cordonnier
Auprès de sa maîtresse.